

13

Bro Frans enn he zristidigez
 Ouzoc'ha zell gant fizianz,
 Ar Frans zo ho rouantelez,
 C'hui a zo he esperanz.

14

'Vit hor bro ni deu d'ho pedi,
 O Mari, hor chelaout ;
 Ar peoc'h a nevez roit d'ezhi
 O Mari he zikourit.

15

O Itron Varia Gledenn
 Hed hor bue beillit varnomp
 Ha dreist pep tra var hon tremen,
 Mam dous, pedit evidomp.

IMPRIMATUR :

Quimper, 8 Août 1892.

A. SERRÉ, Vic. cap.



KANTIK

DA


ITRON VARIA GLEDEN

1

Pardonnerien, deut da Gledenn
 Da henori ar Verc'hez,
 Kinnigomp d'ezhi hor peden
 Ha kanomp oll assamblez.

DISKAN

*O Itron Varia Gledenn
 Benniget ho pugale,
 Deus an Envou deut d'hon difenn
 D'hor sikour e pep mare.*



2

Gout a rit, hor Mam benniget,
 Eo bras hor sempladurez,
 Nemet ganoc'h vemp skoazellet,
 Koueza sur raimp aliez.

3

An ifern dre dud kounaret
A ra brezel domp bemde,
Biken gante na vimp trec'het
Ma vezit deus hor c'hoste.

4

Deut 'ta gant ho torn galloudus
D'hon harpa ha d'hon difen,
Evit ma vimp krenv ha nerzus
Enep hon enebourien.

5

Kant ha kant guech pelerinet.
'Vit ho c'horf hag ho ene,
O veza d'oc'h en em voestlet,
Ho deus kavet ar pare.

6

Kement den a zo e glac'har,
Ni ho ped, Guerc'hez Vari.
Var ar mor pe var an douar,
Deut buan d'her c'honsoli.

7

Ar soudard iaouank pa velfed
O vouela pell deus he vro
Astennit ho torn benniget
Da zec'ha d'han he zaelo.

8

D'ar c'hlanvour kez var e vele,
Dalc'hit, Mari, da c'houlenn
Gras ha sikour digant Doue
Da herzet ouz he anken.

9

Ha d'ar bec'herien kaledet
Grasou ar gonversion,
D'hor c'herent ha d'hor mignonet
Roit dalc'h mad protection.

10

Grit ivez, hor Mamm benniget
Eur zell leun a garante
Ouz an dud a zo dibabet
D'hon hench a berz Doue.

11

'Vit hon Tad santel, Mam dener
Ni ginnig d'oc'h hor peden ;
Beillit varnan e peb anzer ;
Trec'hit he enebourien.

12

Diganoc'h c'houlennomp ive
'Vit kerent ha mignonet,
Er purkator pell deuz Doue,
A boan e vent tennet.